

SIFROÙ AN EIL DEREZ PUBLIK (REKTORDI + UGB)

EMDROADUR E-KEÑVER WARLENE

SKOLIOÙ	NIVER A SKOLIDI 00/01 ⁽¹⁾	NIVER A SKOLIDI 01/02 ⁽¹⁾	EMDROADUR	NIVER A EURVEZHIOÙ 00/01 ⁽¹⁾	NIVER A EURVEZHIOÙ 01/02 ⁽¹⁾	EMDROADUR
Skolaj Boulvriag	35	28	-7	4	6	+2
Skolaj Plouared	32	44	+12	4	5	+1
Skolaj Benac'h	44	48	+4	4	4	0
Skolaj Bear	14	47	+33	1	4	+3
Skolaj Gwengamp Prévert ⁽²⁾	82	111	+29	14 bzhg 9 istor-geo	16 bzhg 10 istor-geo	+3
Lise Gwengamp Pavie	35	17	-18	8	6	-2
Skolaj Gwengamp Camus	39	39	0	4	6	+2
Skolaj Lannuon Ar Goffig ⁽²⁾	107	114	+7	45.5	20 bzhg 13.5 istor-geo 4 muzik 16 jedo	+8
Skolaj Pempoull	31	28	-3	4	3	-1
Skolaj Plouha	13	27	+14	1	2	+1
Lise Pempoull	10	10	0	2	4.5	+2.5
Lise Lannuon An Danteg ⁽²⁾	81	79	-2	30	20.5 bzhg 9 istor-geo	-0.5
Skolaj Landreger	65	61	-4	6	6	0
Lise Landreger	10	12	+2	3	4	+1
Skolaj Plistin	33	46	+13	5	7	+2
Skolaj Gwerliskin	71	80	+9	5	7	+2
Skolaj Montroulez Mendès-France	102	107	+5	7	8	+1
Skolaj Pontrev	58	51	-7	6	6	0
Skolaj Pleuveur-Bodoù	65	62	-3	8	6	-2
Skolaj Perroz-Gireg	38	34	-4	4	6	+2
Skolaj Rostrenen ⁽²⁾	132	119	-13	24	15 bzhg 9 istor-geo 2 tekno	+2
Skolaj Kallag	34	53	+19	4	5	+1
Lise Sant-Brieg Renan	23	23	0	3	6	+3

Lise Sant-Brieg Freyssinet	27	21	-6	8	6	-2
Skolaj Sant-Nikolaz-ar-Pelem	75	92	+17	6	8	+2
Skolaj Korle⁽³⁾	28	58	+30	1	3	+2
Skolaj Sant-Brieg J. Macé	27	19	-8	2	3	+1
Skolaj Sant-Brieg Beaufeuillage	40	27	-13	3	3	0
Lise Lambal		11			3	
Lise Brest An Hirwazh	24	29	+5	6	9	+3
Skolaj Brest An Hirwazh	55	72	+17	6	8	+2
Lise Brest Kerichen	13	4	-9	3	2	-1
Skolaj Brest Kerichen	10	8	-2	2	1	-1
Skolaj Plougastell	26	54	+28	2	6	+4
Skolaj ar Releg	49	65	+16	3	5	+2
Skolaj Lokournan	40	61	+21	4	5	+1
Skolaj Gwitalmeze⁽³⁾		2 strollad			2	
Skolaj Lanniliz⁽²⁾	42	32	-10	4	6 bzhg 3 istor-geo	+5
Skolaj Gwipavaz	49	26	-23	4	3	-1
Skolaj Douarnenez⁽²⁾	62	43	-19	12.5	10 bzhg 6.5 istor-geo	+4
Lise Douarnenez Ar Briz	14	17	+3	4	5.5	+1.5
Skolaj Konk-Kerne	39	30	-9	3	3	0
Lise Kastellin	19	20	+1	5	6	+1
Skolaj Kastellin	45	45	0	4	4	0
Skolaj Pleiben	28	32	+4	4	5	+1
Skolaj Pont-ar-Veuzen	31	32	+1	4	6	+2
Skolaj Landivizio	58	76	+18	6	8	+2
Skolaj landerne⁽²⁾	23	50	+27	15.5	12 bzhg 12.5 istor-geo 4 jedo 4 arzoù	+17
Lise Landerne⁽²⁾	10	11	+1	8	6 bzhg 7 istor-geo	+5
Skolaj Kommanna	36	29	-7	6	3	-3
Skolaj Daoulaz	29	29	0	2	3	+1

Skolaj Pont-'n-Abad⁽²⁾	165	137	-28	18	15 bzhg 6 istor-geo	+3
Lise Pont-'n-Abad	17	7	-10	4	6	+2
Skolaj Plozeved	49	36	-13	6	5	-1
Skolaj Karaez	199	297	+98	12	18	+6
Lise Karaez	27	32	+5	6	7.5	+1.5
Skolaj an Uhelgoad	120	108	-12	9	9	0
Skolaj Kastell-Nevez-ar-Faou	113	119	+6	10	10	0
Lise Kemperle	30	21	-9	6	6	0
Skolaj Kemperle Kervarker	55	51	-4	5	5	0
Skolaj Kemperle Jules Ferry		4			3	
Skolaj Molan	110	37	-73	6	4	-2
Skolaj Kemper Brizeug	67	48	-19	6	4	-2
Skolaj Kemper Max Jacob⁽³⁾		?			2	
Skolaj Ar Gelveneg	28	26	-2	3	3	0
Lise Kemper Brizeug	19	15	-4	5	6	+1
Skolaj Fouenant	48	55	+7	4	4	0
Lise Montroulez	58	45	-13	9	11	+2
Lise Landivizio	21	19	-2	4	6	+2
Skolaj Plouneour-Menez	51	48	-3	5	5	0
Skolaj Lanneur	98	116	+18	7	11	+4
Skolaj Kraozon	20	16	-4	2	2	0
Lise Roazhon Zola⁽²⁾	49	28	-21	19	16.5 bzhg 8 istor-geo	+5.5
Skolaj Roazhon Echange	22	11	-11	2	2	0
Skolaj Roazhon Zola⁽²⁾	38	37	-1	25.5	12 bzhg 12.5 istor-geo	-1
Skolaj Redon	44	60	+16	5	6	+1
Lise Redon	20	14	-6	4	6	+2
Lise Roazhon Bréquigny	5	?		3	3	0
Lise Roazhon		21			6	

Kastellbriant						
Skolaj Roazhon Les Chalais	17	22	+5	2	3	+1
Skolaj Sant-Maloù Charcot	76	95	+19	7	9	+2
Lise Sant-Maloù J. Cartier	12	14	+2	7	6	-1
Skolaj Dinan	38	22	-16	2	3	+1
Skolaj Gourin	71	61	-10	8	8	0
Skolaj Ar Faoued	33	44	+11	4	6	+2
Skolaj Ar Gemene	69	71	+2	8	8	0
Lise Pondi	18	22	+4	5	10	+5
Skolaj Pondi⁽³⁾		12			1	
Skolaj Baod	42	47	+5	3	4	+1
Skolaj Logunec'h	65	101	+36	3	5	+2
Skolaj Pondi Langlais⁽²⁾	159	149	-10	21	16 bzhg 9 istor-geo	+4
Lise An Oriant Dupuy-de-Lôme	89	53	-36	14	13.5	-0.5
Skolaj Keven	39	41	+2	5	6	+1
Lise Lannarstêr⁽²⁾	14	17	+3	9	7 bzhg 6 istor-geo	+4
Skolaj Lannarstêr Wallon⁽²⁾	24	45	+21	18	9 bzhg 12 istor-geo	+3
Skolaj Ploue⁽²⁾⁽⁴⁾	60	73	+13	10	10 bzhg 3 istor-geo	+3
Skolaj Lannarstêr Lurçat	20	27	+7	2	3	+1
Lise micherel An Oriant M. Le Franc	285	246	-39	13	11	-2
Skolaj Henbont Langevin⁽³⁾		?			1	
Skolaj Henbont Curie⁽³⁾		2 strollad			2	
Lise Henbont⁽³⁾		?			2.5	
Skolaj Plunered⁽⁴⁾	50	34	-16	10	12	+2
Skolaj Pleuwigner	31	42	+11	4	4	0
Lise An Alre	11	11	0	4	5	+1
Skolaj An Intel	27	25	-2	2	2	0
Skolaj Sarzhav⁽²⁾	31	28	-3	11	8 bzhg 6 istor-geo	+3
Lise Gwened	9	18	+9	4	6	+2

Lesage						
Skolaj Gwened Montaigne	14	26	+12	1	3	+2
Skolaj Gwened J. Simon	50	29	-21	5	3	-2
Skolaj Ploermael⁽⁴⁾	3	4	+1	3	3	0
Skolaj Gwened Saint-Exupéry	19	3 strollad		2	3	+1
SAMMAD	4902	5020	+118	706	867.5	+161.5

⁽¹⁾ Sifroù ar rektorelezh.

⁽²⁾ Rouedad divyezhek.

⁽³⁾ Digoradur.

⁽⁴⁾ YV1 bis.

Un nebeut reolennoù diazez SKOLAJOÙ

BF1 (Langue et civilisation régionale, initiation eus ar 6vet betek an 3de klas) :
1 eurvezh/sizhun.

Reolennoù dasparzh an eurvezhioù d'ar skolajoù :

- a) Pa vez roet an danvez da holl klasadoù 6vet ar skolaj : 1 eurvezh da bep klasad.
- b) Pa vez dibabet an danvez gant ar vugale hag o zud azalek ar 6vet klas :
 - a. 'Tro 8 pe 10 bugel evit digeriñ ar rann (ma n'eus ket anezhi er skolaj).
 - b. Ur strollad betek 15-16 skoliad = 1 eurvezh. Goude-se 1 eurvezh dre strollad 15 : 17 skoliad = 2 eurvezh ; 32 skoliad = 3 eurvezh...

BO3 (Option langue bretonne, 4re ha 3de klas) : 2 pe 3 eurvezh/sizhun da bep strollad.

Reolennoù dasparzh an eurvezhioù d'ar skolajoù :

- a) Ouzhpenn 5 skoliad e pep live (4re, 3de) : liveoù dizalc'h.
 - a. Etre 6 skoliad ha 21 skoliad : 2 eurvezh d'al live.
 - b. En tu all da 21 skoliad el live : 3 eurvezh d'al live.
- b) 5 skoliad pe nebeutoc'h eget 5 en ul live : strobet e vez an daou live. Hevelep reolennoù evit an eurvezhioù. Er bloaz-mañ n'eus ket kalz a lec'hioù gant ar sistem-se ma ranker strobañ 2 live.

Evezhiadenn : warlene e veze strobet 2 live pa veze dindan 9 bugel en ul live !

Hentenn divyezhek :

- Brezhoneg : 3 eurvezh/sizhun. Strobet e vez al liveoù 2x2 ma vez nebeutoc'h eget 8 bugel en ul live. Dalc'het ez eus kont eus niver bihan ar skolidi en hentenoù-se memes tra hag eus servij ar gelennerien. Ar cheñchamantoù a zo bet e-keñver warlene a zo war an tu mat. E Landerne da skouer ez eus gounezet un toullad mat a eurvezhioù a-drugarez d'ar "pôle tournant" a vo lakaet e plas er bloaz-mañ.

- Istor-douaroniezh : 3 eurvezh pe 3 eurvezh hanter hervez al live ha niver ar skolidi. Ma talc'her da strobañ liveoù zo abalamour d'an niver a skolidi atav, ne vez ket graet james evit an 3de klas a vez distag dalc'hmat.
- Arzoù-kaer, sonerezh : ar reolenn eo ar sistem lakaet e plas er bloaz-mañ.

LISEOÙ

LVII/LVIII : 2vet : 2 eurvezh hanter ; 1añ : 3 eurvezh ; Termen : 3 eurvezh. Ken dister eo deuet da vezañ niver al liseidi e lec'hioù zo ma n'eus ket bet tu da zalc'her d'ar reolenn-se (6, 7, 8... lisead en holl a-wechoù !). Pouezet ez eus eta war an efedusted kentoc'h eget dalc'her d'ur reolenn na dalve ket netra ken e gwirionez (ober skol d'unan, da zaou...) :

- Degemer gwelloc'h al liseidi o tont en eilvet klas. Kinnig daou strollad da skouer da ziforc'hiñ ar re o deus graet un tamm brezhoneg dija diouzh an deraouidi rik. E-se eo bet kresket an niver a eurvezhioù e Montroulez, Pondi, Douarnenez, An Hirwazh...
- Klasket ez eus reiñ 6 eurvezh da nebeutañ da bep lise : danvez d'ober 2 pe dri strollad dereat. Un dornadig liseoù avat a zo chomet gant 4 eurvezh nemetken (3 eurvezh zoken evit Brequigny) abalamour da servij ar c'helenner bezañ pase leun ha d'an niver izel a liseidi disklêriet.

Hentenn divyezhek : 3 eurvezh/sizhun a vrezhoneg ; eurvezhioù istor-douaroniezh hervez al lezenn (peurliesañ, met hervez niver al liseidi ivez) ha liveoù strobet (nemet er c'hlasadoù termen). N'eo ket gwall blaen an traoù amañ.

Digeriñ/Serriñ

Er bloaz-mañ ne vo serret skol ebet el lec'h ma vez graet brezhoneg. Met a-benn bloaz e vo serret an traoù e Kerc'hichen (Brest) ha kaset d'an Hirwazh

Digoret e vo an nor d'ar brezhoneg e :

- a) Skolajoù :
 - a. Opcion BF1 (6vet klas) : Gwitalmeze (Porzhsall), daou skolaj Henbont, Max Jacob (Kemper)(digoret en-dro !)
 - b. Opcion divyezhek : Lanniliz (3de brezhoneg + istor-geo + sonerezh pe/hag arzoù-kaer), kreizenn Landerne-Plougastell-Gwipavaz ("pôle tournant") : roet eo an holl eurvezhioù ret evit ma'z afe ar "pôle" en-dro ar gwellañ posupl. Siwazh n'eo ket deuet Gwipavaz e-barzh ar jeu met dont a raio bugale eus Gwipavaz memes tra. Kas ha degas ar vugale a vo graet war e dro gant Kuzul Meur Penn-ar-Bed.
- b) Liseoù :
 - a. LVIII e lise Victor Hugo (Henbont) ha lise Kastellbriant (Roazhon) el lec'h ma oa un opSION DIRET abaoe daou vloaz.

Traoù all mesk-ha-mesk

Implijoù :

- a) Distro-skol 2000 : Ouzhpenn ar 37 ETP (Equivalentes Temps Plein) bet roet gant ar Minister e oa bet lakaet 11 ETP gant rektorelezh Roazhon diwar ar yalc'had hollek roet d'an akademiezh = 48 ETP.
- b) Distro-skol 2001 : 5 ETP ouzhpenn a vo lakaet evit talañ ouzh ar c'hresk (2 : "suite de scolarité" ; 3 : "nouvelles ouvertures") = 53 ETP.

Kelennerien : Distroet eo ar re a oa bet anvet en diavaez eus an akademiezh. Stajidi (PLC2 2000-2001) a zo chomet e Breizh. Tri gelenner war danvezioù all a zo bet "prestet" da akademiezh Roazhon evit bloaz ("Mise à disposition de l'académie pour un an") dre m'o doa lavaret e oant prest da gelenn o danvez dre ar brezhoneg pe da gelenn brezhoneg ma vez goulennet diganto hen ober. Ret e vo dezho goulenn ar memes tra a-benn bloaz, met ne vo diaezamant ebet moarvad evit ma vo roet o c'hoant dezho betek ma vo roet ur post dezho er vro da vat. Evit ar wech kentañ e tleje bezañ ur post erlec'hier ("titulaire remplaçant") hon eus muioc'h-mui ezhomm anezhañ er bloaz-mañ.

Stajidi : 6 stajiad PLC2 a vo er bloaz-mañ e : Gwerliskin, Montroulez, Pont-'n-Abad, Pondi, Gwened, Henbont.

Ronan L'HOURE
Kenurzhier an eil derez
ronan.lhourre@wanadoo.fr